

# Divizout adarre

Etre 8000 ha 9000 den a oa bet o vanifestiñ e Kemper d'ar Sadorn 10 a viz Du evit goulenn groñs ur statud publik evit skolioù Diwan, ha muioc'h c'hoazh : anaoudegezh ar brezhoneg, en diavaez eus ar skol ivez. Sklaer e oa eta respont ar boblañs hag ar c'hevredigezhioù ouzh diviz ar C'huzul-Stad o nac'hañ degemer Diwan en Deskadurezh Stad.



Muioc'h eget 8000 den a oa bet o kerzhet e straedoù Kemper d'an 10 a viz Du evit goulenn ma vo roet ur statud publik da Ziwan, hag ivez, ma vo roet muioc'h a blas d'ar brezhoneg er vuhez foran.

**U** r giton «Ya d'ar brezhoneg, cheñchomp ar Vonreizh» en deus digoret ar vanifestadeg, a-dreñv dezhañ ur mor a vannieloù ha gitonioù hiniennel a bep seurt, lusket e oa gant ar biniou hag ar vombard o seniñ «Breizh da virviken». Skolidi, kerent ha kelennerien eus tout ar skolioù diyezhek a oa startijenn ganto evit prouiñ d'ar Stad int prest da stourm evit o yezh. Ral a-wech ez eus bet gwelet ur skeudenn ken ledan eus ar gevredigezh unanet a-dreñv ar skolioù Diwan : familhoù a-bezh, koulz ha tud-kozh ha krennarded, gant ar santimant bezañ bet taget o yezh hag o sevenadur. Dilennidi a-bep seurt ivez evel Pierre Maille, prezidant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed, ha sindikadoù, en o zouez rann deskadurezh ar SGEN-CFDT. En ur ober a-boan ur sizhunvezh eo deuet a-benn Diwan, UGB, Divezhañ ha Dihun da aozañ ur vanifestadeg «*arouezius eus skeudenn ar gevredigezh*» eme

Andrew Lincoln, prezidant Diwan. Ouzhpenn Breizhiz zo bet o c'hervel d'ar vanifestadeg-mañ : ar C'hendalc'h Tamazig Etrevroadel zo «*savet gant nerzh a-enep nac'hidigezh ar brezhoneg ha dre vras hini holl yezhoù Frañs.*» Evit ar verbered eo poent «*didrevadenniñ Frañs a zo he fennoù uhel oc'h huñvreal deus ar vro mod Jules Ferry.*» Unan eus gitonioù Kemper a oa betek ober eus ar CNAL ur c'homite «nazional»

Ar C'huzul-Stad a oa bet krouet e 1799 gant Bonaparte. Barner melestradurel uhelañ ha kuzulier ar gouarnamant eo ar C'huzul-se. D'ar Meurzh 30 a viz Here en doa nac'het peder zestenn diwar goulenn ar CNAL (Conseil National d'Action Laïque) : testenn an emglev bet sinet ent-ofisiel d'al Lun 28 a viz Mae gant Andrew Lincoln ha Jack Lang e Roazhon (s.o. niv.237), an deved o krouiñ Akademiezh ar Yezhoù Rannvroel, an dife-rad o reiñ lañs da skolioù e yezhoù rann-

vroel hag ar c'helc'h-lizher a-zivout ar soubidigezh. N'eus nemet ar skrid o tennañ d'ar c'helenn divyezhek kevatal hag a zo bet degemeret gant ar C'huzul-Stad. Da neuze ez eus tud o deus aon e vefe goulennet digant Diwan dilezel ar soubidigezh rak hervez ar CNAL ez eo an doare-se da gelenn arvarus evit ar galleg hag unded Frañs.

## UN HENTENN 25 BLOAZ

Droch eo diviz ar C'huzul-Stad hervez Komision Deskadurezh Kuzul Sevenadurel Breizh : «*War a seblant ne ziskouez ket ar C'huzul-Stad gouzout dre e guzulia-denn, e vez Diwan o skoliañ dre soubidigezh abaoe tost da 25 bloaz, e vez tittlel e gelennerien goude enselladenn an Deskadurezh Stad abaoe 10 vloaz, hag e tiskouez an holl briziadurioù disoc'hoù e galleg ne c'haller ket nac'hañ.*»

Met peadra zo da vezañ chalet pa lenner dindan bluenn Bernard Poignant, aozer

un danevell diwar-benn ar yezhoù a reer rannvroel anezho : «*Ret eo lakaat an testennoù da cheñch evit a sell ouzh ar yezh implijet e diabarzh ar skolioù Diwan (...) Soubidigezh dre ret er c'hlas ? Perak ket. Met, frankiz a zibab yezh an diavaez ivez.*»

Barnadenn ar C'huzul-Stad, avat, ne sell ket ouzh danvez an testennoù. Diwezhatoc'h (ne ouezer ket pegoulz) e vo studiet pizh gant ar Guzulerien-Stad. Evit poent eo ehanet an traoù met ur breutaer arbennigour zo bet anvet gant Diwan evit ma vo savet ur gwir-dic'haou dirak ar C'huzul-Stad da zifenn hentenn Diwan. «*Ezhomm hor bo da vezañ harpet gant an holl Vretoned, rak ar brezhoneg zo afer an holl, hag hini an dilennidi Breizh anat. Arabat disoñjal ez eus ur bern strollegezhioù lec'hel hag o deus votet evit sikour Diwan, o reiñ bod d'ar skolioù pe o kemer e-karg frejoù zo. Ret e vo dezho kenderc'hel ha pouezañ war ar Stad evit ma toujo d'he ger*» eme Andrew Lincoln, prezidant Diwan. Fellout a ra dezhañ e vefe lakaet statud publik Diwan e pleustr a-benn distro-skol 2002, daoust da bep tra.

### «UR SKOILH BIHAN»

Hervez Jack Lang e vo graet. «*Ar skoilh bihan bet savet gant ar C'huzul-Stad a vo tremenet dreistañ hep re a ziaesterioù peogwir e soñj din ez eo hervez lezenn an testennoù hon eus kinniget evit ma vo embarzhet Diwan en Deskadurezh Stad.*» D'an 8 a viz Du e oa bet votet gant ar Parlamant rakbuded Ministrerezh an Deskadurezh m'emañ 194 «post Diwan», kelennerien ha nann-kelennerien. Doujañ a ra da lezenn Debré 1959-60 a-zivout ar skolioù prevez. «*Mennad 65 al lezenn ne ra ket anv eus an hentenn bedagogel dibabet gant ar gelennerien a vez titlet gant ar Stad hag ingal e vez embarzhet implijidi ar skolioù prevez en Deskadurezh-Stad*» a lavare Jack Lang goude ar vouezhiadeg. «*N'eo ket trawalc'h peogwir eo diazezet ar sifroù-se war distro-skol 2000 met diskouez a ra e kendalc'homp da vont war-raok*» eme Anna-Vari Chapalain, renerezh Diwan. Kalzik a strollegezhioù lec'hel o deus divizet kemer perzh en arc'hantañ ar skolioù Diwan, ivez. Ti-kêr Lesneven, da skouer, en deus graet kemend-all goude barnadenn ar C'huzul-Stad ha ti-kêr Roazhon en deus embannet e vo sikouret Diwan ha doujet d'e bedagogiezh evel ma oa bet rakjedet evit distro-skol 2002. Eus e du, ar C'huzul rannvro en deus embannet bezañ mennet da brenañ savadurioù lise Diwan da di-kêr Karaez.



Jean-Do Robin



Alan ar Gal



Yannig Baron



Andrew Lincoln



Armel ar C'hozh

Estreget ur statud publik evit Diwan a veze goulennet d'an 10 a viz Du e Kemper gant aozerien ar vanifestadeg. Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg zo aet skuizh, da skouer, gant promesaoù ar Stad evit a sell ouzh kenstrivadeg ar gelennerien vrezhonek. «*Da gentañ-penn e oamp o c'hortoz ur genstrivadeg a-ratozh. Deuet eo da vezañ unan ispisial ha c'hoazh emaomp o c'hortoz an testennoù ofisiel da grouiñ anezhi*» a lavar Armel ar C'hozh «*Ma ne vezont ket embannet er sizhunoù o tont e ranko danvez kelennerien Diwan mont da dremen kenstrivadeg ar skolioù prevez dre soubidigezh en Okitania. Ar seitek den a zo oc'h heuliañ ur stummadur e Sant-Brieg da vont da gelennerien divyezhek n'o do mui nemet lakaat o anv evit tremen ar genstrivadeg c'hallek. Digalonekaüs eo. Ur genstrivadeg ispisial n'eo ket diaes da lakaat e pleustr, koulskoude. Aozañ arnoddennoù ouzhpenn zo d'ober hepken. Met evit se eo ret kaout ur gwir youl bolitikel...*»

### TABUT AR STATUD RANNVROEL

An hevelep youl a ranker kaout evit sevel un astenn d'ar gevrat-steuñv a renablo hag a zoujo da ezhommoù Breizh «*rak un emglev mat evit Diwan a dalvez kement hag ur steuñv diorren evit ar brezhoneg*» eme Andrew Lincoln. Ar skrid bet savet betek-henn gant ar Stad a ginnig krouiñ 50 post kelenner ar bloaz e-kerzh ar pemp bloaz o tont. «*N'eo ket trawalc'h. Ne raio nemet gwaskañ kresk ar vugale skoliet e brezhoneg war-dro 5% ar bloaz*» a lavar Pol Molag eus Div Yezh. «*Abalamour da-se, ivez, n'hor boa ket kemeret perzh er vouezhiadeg bet dalc'het a-zivout an dra-se er CESR (Conseil Economique et Social de Région) e kreiz miz Du*» eme Jean-Do Robin, e penn Komision Deskadurezh Kuzul Sevenadurel Breizh. Amañ hag ahont e sav ar mouezhioù evit embann ne c'hello ket ar brezhoneg mont war-raok keit ha ma chomo frammoù lezennel ha bonreizhel Frañs er stad m'emaint. «*Ret eo cheñch ar Vonreizh ha kadarnaat Karta Europa ar Yezhoù*» a lavarer c'hoazh. Dihun a ya pelloc'h pa'z embann «*e rankfe ar C'huzul-rannvro bezañ e-karg eus an Deskadurezh hag eus diorren ar brezhoneg e Breizh*». E-diabarzh Div Yezh n'eus ket bet kavet ur savboent ofisiel a-zivout an dra-se c'hoazh. E-touez izili Diwan, avat, ez eus tud a sav a-du gant ar mennozh. Hervez ur bodad-evezhiañ bet savet e Karaez e vefe «*un diskoulm eus ar re wellañ*».

S.G.